

DEZREVELLOÙ AN DUD KENFINET

RÉCITS DE CONFINÉS

Ur bac'hadur nevez e miz Du. Ur c'hleñved-red a oa o foetañ ar vro abaoe an nevez-amzer. E-pad an hañv e tigriskas niverenn a glañvourien hag an dud a grede e oa echuet gant ar c'hleñved. Met e penn-kentañ an diskar-amzer, e kreskas adarre niverenn a glañvourien. Neuze e oa bet divizet ur bac'hadur nevez gant ar gouarnamant evit ar miz Du.

Sebezet e oa bet an dud peogwir e oa oc'h adkregiñ tout an obererezhioù hag ar varc'hadourien a oa bet strafuilhet gant an treuzvevañ ar c'henwerzh goude ar bac'hadur kentañ.

Evidon, echu al labour gant ur gevredigezh diwar-benn istor al lec'h, echu ar pleustradegoù gant al laz-kanañ, echu ar gentel vrezhoneg e SKED ! (met kenderc'hel e mod a-bell memes tra !)

Se zo evel vakañsoù hep beajiñ ha kalz amzer vak zo !

